

ADRIEN DE CARNÉ

Da z an Arvor



Kristen ha Breizad du Loken

# SACH' AR MARICHAL

C'hoari farsus en eun Arvest



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwêñern, 27, bali Charner

1913


ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor

Krislen ha Breizad da virviken

# SACH' AR MARICHAL

C'hoari farsus en eun Arvest



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charnor

1913

Diocèse de  
Quimper & Léon  
Évêché de Quimper et Léon

Document numérisé en 2016

## ARGUMENT

---

Loull et Yannig, deux vauriens fieffés, volent un sac le jour du mardi gras. Ils se cachent, sans le savoir, dans la salle de la justice de paix. Le juge étant absent à cause du carnaval, ils sont bien tranquilles, ouvrent le sac et y trouvent des outils de maréchal ferrant, des victuailles et deux bouteilles pleines. Ils font bombance. Un gendarme qui n'est dans le pays que depuis la veille, apparaît dans la cour. Loull et Yannig revêtent les robes du juge et du greffier. Le gendarme s'y trompe naturellement et fait son rapport à Loull sur le vol du sac. Le vrai juge rentre inopinément. Loull le fait expulser par le gendarme. Le propriétaire du sac volé survient et tout se découvre. Loull et Yannig sont pris de vives douleurs ; une des bouteilles contenait un violent remède pour le bétail. Ils s'endorment lourdement et le juge les fait emprisonner.

Moralité : le métier de voleur n'est pas un bon métier.

## C'HOARIERIEN

---

LOULL, ribler touet.

YANNIG, ribler aounik.

DENEZ, barner a beoc'h, e varo dem wenn.

BOLOD, marichal, medisin chatal.

KROGENNEK, archer.

An dra ma a dremen e Breiz Izel, en eur vourc'h.  
Eur zal vrás, eun daol ha bankou enni. War eur  
gador, gwiskamanchou barner, diou zae hag eur  
boned, eur galons aour warnan.

## KENTA DIVIZ

DENEZ, e unan, e dok war e benn, e vaz  
en e zourn, e zremm laouen.

Plijadur am eus ouz ho kwelet, va zud vad, ia, plijadur am eus. Ha kouls-koude, emaoun o vont kuit buhäua ma c'hellin. Ia. Sellit ouzin ta. Me a zo va zok war va fenn, va baz em dourn. Dimeurs al lard eo, meurlarjez eo. Hirio ne labourer ket, hirio ne reer netra, na skrituriou, na barniou. Hirio n'eus nemet ebatou, c'hoariou ha c'hoarzaden-nou gant an dud. Ha perak ta ne rafen ket me evel ma ra ar re all, eul lip e bao ben-nak, eun tamm lein vad peb en amzer ? Evidoun da vez a barner a beoc'h, me am eus, evel an holl dud, eur c'hof-bihan hag a blij d'ezan ar gwin koz, ar c'high moc'h, ar wa-degen, ar zilzig drus, ha me oar me ? O c'hoar-zin. Ha, ha, ha, ha ! Me a zebro hirio eur bern traou mat evelse, e ti va mignoun Gweno-le Brouskao, barner a beoc'h e Guitalmeze, evel ma 'z oun me barner a beoc'h aman. Kenavo, va mignouned keiz, ha meurlarjez mat d'eoc'h, ha d'in me ive. Kenavo. *Denez a ia kuit o saludi an dud. Yannig a zeu ebarz, e zillad pemde: warnan, koz dillac fall ha lous, boutou koat.*

## II DIVIZ

**YANNIG, e unan, o sellet piz oc'h pep tu, o krena gant an aoun.**

O ! santez Anna ! O ! sant Yan Vadezour, va faeroun, ho pet truez ouzin ! Mé roio d'eo'ch peb a c'houlaouenn rouzin tevo'ch egedoun me mar am zennit eus skilfou an archerien. *O wela stank.* Hi, hi ! heu, heu ! *O sellet oc'h pep tu* Den ebet. Krena a ran evel eur barr deliou, Awal'ch am eus awal'ch bras eus micher al laer. Loull, va mignoun, en deus laeret, n'eus nemet eur pennad, e porz eun hostaliri, eur zac'h pounner leun a draou a bep seurt. Me zo eat kuit dioc'htu, neuze, gant aoun na zeufe an dud da c'haloupat war va lerc'h. *Trouz boutou koat er meaz.* Yannig en em laka da greña adarre. O la la ! o la ! Piou eo ?

*Loull a zeu, o tougen gant poan eur zac'h teo war e gein. Gwisket eo ive gant truillou ha pillow. Boutou koat en deus.*

## III DIVIZ

**YANNIG, LOULL**

**LOULL, o c'hoar in a bouez penn**

Ha, ha, ha ha ! pe seurt drémm zivalo ganez ! Te zo gwenn da groc'hen evel eur bodezad leaz.

**YANNIG**

Podad leaz té da unan. Ne fell mui d'in, diwar-vrema, chom da ober ganez mil dro fall ha kamm n'eus ezomm nemet unan anezo da

gas ac'hanomp d'ar prizoun. Mervel a ran noz deiz gant an aoun.

**LOULL, o lakaat ar zac'h war an daol**

Aoun ! Aoun perak ? Laeret em eus ar zac'h se e porz hostaliri ar Marc'h Gwenn, ha den ebet n'en deus va gwelet. Deuet oun beteg aman goustadik, goustadik, evel ma ven me eur paour keaz pillaquer o tougen e bagadig truillou. *O sevel ar zac'h diwar an daol.* Mes pounner bras eo ar zac'h daouet se ha, war va mennoz, e kavimp ennan peadra da ober, ni ive, eun tammig meurlarjez evel ar re all. Ni n'eus nemet hon daou, aman, Yannig. Piou a zeufe d'hor c'herc'hat ?

**YANNIG**

N'oun ket dinec'h bras. Ha da genta, e peleac'h emaomp aman ? Petra eo ar zal vras ma m'omp deuet enni, hep sonj, evel daou zen diskiant ?

**LOULL**

Petra eo ? Sell ta ! Yan al leue ! Eun daol, bankou koat, An ti-skol eo, sur. Setu taol ar mestr-skol ha bankou ar ribitaill marmouzed.

**YANNIG, o krena gant aoun hag o tiskouez ar zaeou barnér war eur gador**

Ia da, ia da' hag an traou ze ? Ne ket evit ar vugale eo ez int, a gav d'in. Yannig a ia kuit buhan. *Loull a ia beteg ar gador m'ema warni ar zaeou barner,* hep gwelet eo eat kuit Yannig.

#### IV DIVIZ

LOULL *e unan*

Aoun ac'h eus rak eur goz sae ha rak eur c'hoz voned barner ? Evidoun me, avad, n'em eus ket. *En eur drei, Loull a wel eo eat Yannig er meas.*

Sellit ta ! Da beleac'h an diaoul eo eat adarre an diot se ?

*Yannig ! Yannig ! Deus ta !*

YANNIG, *er meas, o krial*

Ne rin ket, ne rin ket.

LOULL *oc'h ober goap*

Ne rin ket, ne rin ket. Ma ne zeuez ket en dro raktal, me a ielo d'az tiskleria dioc'htu d'an archerien.

YANNIG *er meas*

O la ! o la ! Me a zeu, Loullig, me a zeu. *Yannig a zeu en dro.*

#### V DIVIZ

LOULL, YANNIG

LOULL, *droug ennan*

Peus ket a vez, azen gornek, peus ket a vez, o tilezel er c'hi<sup>z</sup> se eur mignoun koz a ro, d'it, evel eun tad mad, an hanter eus an traou a c'hounid o laerez deiz ha noz ? Peus ket a vez, pez didalvez, aounik evel eur c'had ? Lavar ta ! Perak ec'h eus atao c'houenn en da lerou *O chourdrouz anezan.* Lavar ta !

YANNIG, *o wela*

N'em eus ket a lerou.

LOULL, *droug ennan atao*

N'eus fors. Te zo eun tamm brao a c'he-naouek. Te zo bihanoc'h da spered eget hini eur batatezenn eur banezenn pe eur gueuneudenn. N'eo gwir ? *Yannig ne lavar tra. Lavar ta ! O vont da skei gantan. Lavar ta ! N'eo gwir ?*

YANNIG

Eo.

LOULL

Mad. Ar pedved eo eus ar miz ?

YANNIG

Ar meurlarjez.

LOULL

Kompren a rez breman ? Hein ? Da veurlarjez ar varnerien ne varnont ket. Emaint hollo vale, o c'hoarzin, o tibri n'oun dare beleac'h. Ne ket en ti skol eo, a dra zur, emaomp, mez e ti ar barner. Gwellia ze. Piou a zeufe dirak kador eur barner deiz ar meurlarjez ? Barner ebed, grefier ebed, alvokad ebed, archer ebed, den ebed. Ni a vez o siouloc'h aman, eget n'eus fors e peleac'h. Kompren a rez, Yannig ?

YANNIG

Ia, mez eun archer bennak a zeuio, marteze. Ar re ze a zo hir o fri hag emaint atao o firboucha en eun tu pe du.

LOULL

Ne raint ket. Ha pa zeufe unan bennak  
anezo n'em bije ket aoun, me.

YANNIG

Perak ta ?

LOULL

Perak ? Me zo fin va skouarn ha klevet em  
eus eun dra vat evidomp. An daou archér a  
jom aman, hag a anavez ac'hanomp, kalz re  
zoken, zo bet kaset da Guitalmeze ha re Gui-  
talmeze zo bet kaset aman, daou zervez zo.  
Er c'hiz se, daou archer nevez zo aman. Ar re  
ze n'anavezont ket, an distera, na Loullig na  
Yannig. *C'hoarzin a reont o daou. Mat ;*  
*deomp da welet, bremen, pe seurt traou a ga-*  
*vimp en hor zac'h. Digeri a reont ar zac'h o*  
*daou. Loull a denn, er meaz, eun durkez*  
*vras, eur morzol téo, daou pe dri houarn*  
*marc'h, eur goz chupen. Lakaat a ra an holl*  
*draou ze war an daol.*

YANNIG o c'hoarzin,

Labour vat ac'h eus great, feiz ! o laerez ar  
zac'h se. Her laeret e peus evit ober da viurlar  
jez. Mat ; mar deo goullo da gof, dibri a  
c'hellez an durkéz hag an hern kezek ma. Sac'h  
eur marichal eo e peus laeret va mignoun  
keaz. un dra zister n'eo ken.

LOULL

Ro peoc'h ta, boued ar gordenn. N'oun ket  
eat c'hoaz bete gwaled ar zac'h. Gortozit eun

tamm, aotrou. *Furcha a ra adarre. Gant eur*  
*vouez laouen* Na petra ta ? Bara gwiniz, eur  
pesiad mad a gig sal, eun tamm fourmach !  
Ha, ha ! petra am boa lavaret d'it ? An aotrou  
Doue a ro ar boued d'an evnedigou. *Lakaat a*  
*ra an traou war an daol.*

Brao, kenan, brao ! Echu eo ? *Furcha a ra.*  
N'eo ket ; traou dudius en em gav c'hoaz  
dindan va dourn. Sell ta ! Yannig, sell ta !  
*Lakaat a ru war an daol diou voutail, unan*  
*vras, eun all bihan. Pebez taol chans, Yan-*  
*nig ! Dibri a reont.*

YANNIG, o tibri

Pell zo n'em boa debret gant kement a bli-  
jadur. Va bouzellou oa goullo aboue pell. En  
em laouenaat a reont.

LOULL, o tibri

Va re ive, Yannig, va re ive. Mes va c'hor-  
naillen geaz a c'houlenn ivé. Vad a rafe d'e i  
eur banne gwin. *Yannig a ro d'ezan ar vou-*  
*taill vihan.*

Ro d'in an hini vrás. Ar boutaihou, pa  
vezont bihan, a vez an traou ar gwella enno.  
*Eva a ra o lakaat en e c'hinou gouzouk ar*  
*voutail. Yannig a ev, eveltan, en e c'houde*  
*Frota a reont o c'hof, o daou, laouen, goude*  
*beza evet.*

YANNIG

Lein ar marichal a zo mat kenan, va Loullig,  
va mignoun, poupig va c'haloun.

LOULL

Ia da, va Yannig, va moutig, va c'hoantik.

YANNIG

Me lavaro eur bedennig hirio d'an noz,  
Loullig, me lavaro eur bedennig evit ar marichal  
mad se, a ro d'an dud paour o zammig  
boued. N'eo gwir Loullig ?

LOULL

Eo, Yannig, eo. Dal, kemer eun tamm fourmach. *Dibri a reont o daou.*

YANNIG, *o tibri ar fourmach*

O ! Santez Ventrok patrounez va mamm geaz ! pebez fourmach ! great eo gant leaz eur vioc'h zu, eur vioc'h Kerne O ! Loullig, va labousig koant, Loullig va c'halounig ! Hon tad kenta, Loullig hag hor mamm genta, n'oa ket ganto er báradóz eur fourmach gwennoc'h na gwelloc'h eget heman. Ne ket ta ?

LOULL

N'oa ket. Mes maro oun gant ar zec'hed, Yannig. Ar voutaill vrás ne jom mui netra enni. Kemeromp an hini vihan. *Eva u reont o daou peb a hanter eus ar voutaill vihan.*

YANNIG, *goude beza evet*

Peuh ! ne ket ker mat ar gwin ze *hag* an hini kenta.

LOULL, *goude beza evet*

Eun tamm krenvoc'h eo, a gav d'in. Mez evit tud paour evelomp ni ar gwin zo mat atao, n'eus fors eus a beleac'h e teu. Mat. Breman deomp kuit da Vrest. Gwerza a raimp

eno koz traou ar marichal. *An daou a gerner an traou evit o lakaat er zac'h.*

YANNIG, *o krena en e holl izili*

Aï ! Aï !

LOULL

Petra zo adarre, petra zo ?

YANNIG, *o sellet warzu ar meaz*

Aï ! Aï !

LOULL, *o c'hoapaat*

Aï ! Aï ! Petra an dra ze : Aï ! aï !

YANNIG

Sell ta ! mil malloz ! Me am boa aoun gant gwir abeg. Eun archer a welan, duhont, o vont aman.

LOULL, *o sellet*

Gwir eo. Mez eun archer nevez eo. evel m'am eus lavaret d'it. Koulskoude red eo d'eomp beza fin, Yannig. *Loull a daot buhan en eur c'horn an durkez, ar morzol, ar zac'h, an holl draou diwar an daol, nemet ar paperiou, ar pluennou hag ar pod liou.*

En em wisk buhan gant sae ar grefier, Yannig, me en em wisko gant hini ar barner, eboned alaoured war va fenn. *Ec'h en em wis-kont buhan gant ar zaéou. Hast affo ta ! hast, affo ! Pa vezont gwisket o daou, ec'h en em lekeont ouc'h taol, azezet an eil tost d'egile oc'h ober neuz da skriva gant evez war ar, paperiou. An archer a zeu ebarz.*

## VI DIVIZ

LOULL, YANNIG, KROGENNEK

KROGENNEK, o saludi

Me ho salud gant doujans, aotrou barner.

LOULL, rust e vouez

Perak e teuit aman ? Ne varner ket hirio. c'houi a oar, ha labourat start a ran gant va grefier, p'eo gwir hon eus eun nebeudig amzer ganeomp. Petra fell d'eoc'h ? Yannig a gren atao.

KROGENNEK

Me a c'houlen pardoun diganeoc'h, aotrou barner ; kaset oun bet aboue deac'h hepken, barer vro ma, mez eun dra vras am eus da laveret d'eoc'h. Yannig, deuet du veza foll gant ar spount, a gouez dindan an dao!

LOULL

Ha, va Doue, va Doue ! va grefier paour kouezet dindan an dao. Roit eun tammig skoaz d'in, mar plij, evit e zevel diwar an douar.

Loull ha Krogennek a laka a nevez Yannig war e gador. Yannig a gren atao.

Va grefier a zo klanv bras, pell zo. Ne c'heulin ket mirout, pelloc'h amzer, e garg d'ezan, siouaz !

KROGENNEK, gant truez

Paour keaz aotrou Petra en deus ?

LOULL

Droug Sant Yann a zo gantan.

## KROGENNEK

Paour keaz aotrou !

LOULL

Ha petra eo ar pez oc'h eus da lavaret d'in ?

KROGENNEK

Deuet sun dira oc'h, aotrou barner, a berz an aotrou Bolod, medisin chatal. Hennez a zo bet laeret e zac'h, m'edo ebarz e vinyiachou, e zilhad hag e lein. Laeret eo bet ar zac'h e porz hostaliri ar Marc'h Gwenn. Yannig c'hoant kousket gantan, a zigor frank e c'hinou, hag a laosk eur vlejadenn vihan.

LOULL

Feiz va Doue, me anavez al laeroun, her c'hredi a ran awalc'h ; n'eus nemet eur pennadig, va grefier ha me, hon eus gwelet o tremen, er meaz, daou ribler eus ar re gaera, gwisket gant tammou koz dillad fall. Unan anezo a oa eur zac'h teo war e gein. Ho taou labous eo, a gav d'in. Ar re e n'int ket pell, a dra ur. O redek war o lerc'h dioc'htu, va mignoun, gant ar ru vras, duhont, kregi a reot enno ; mez hastit affo ! hastit buhan.

KROGENNEK

Ia aotrou barner. Denez a zeu ebarz

## VII DIVIZ

LOULL, YANNIG, KROGENNEK, DENEZ

DENEZ, soie et neat

Sell ta ! sell ta ! Biskoaz kemend all ! N'em

eus ket gwelet eur c'hoari gaer ker brao. Piou eo ar re ze, gwisket gant va dillad barner ha re va grefier ? kousket a ran, a gav d'in.

**LOULL a vouez krenv**

Archer ! piou a zeu aman hep her goûlenn digahen ?

**KROGENNEK da Zenez, rust e vouez**

Ia, ia, piou a zeu ? Piou oc'h ? Petra a fell d'eoc'h ? It kuit er meaz ha buhan. *Yannig en deus aoun o klevet an archer o krial.*

**DENEZ, d'an dud**

Kompreñ a ran. Unan eus an archerien nevez eo, na anavez ket ac'hanoun.

**KROGENNEK, droug bras ennan**

Petra valbouzit adarre ? Awalc'h am eus gant o lavariou a bep seurt. En hano an aotrou barner, me ho taol er meaz, hag ez an da c'haloupat war lerc'h al laeroun.

*Krogennek a gas Denez er meaz o vounta krenv anezjan, hag ez a kuit hen ive.*

**VIII DJVIZ**

**LOULL, YANNIG, azezet o daou atao**

**LOULL**

Deomp kuit ive Yannig. Ne d-a ket mat an traou ganeomp, breman ; deomp.

**YANNIG, oc'h hirvoudi**

Ne c'hellan tamm ebed. Karget eo va c'hoif a boaniou. O la ! o la ! la la !

**LOULL, o sével hag o krial**

Mil dan kurun, va c'hoif ive a zo droug gantan. Petra zo ennomp ta ? Aiou, la, la, la. Va bouzellou zo freuzet. Red eo d'in azeza. *Loull a asez a nevez oc'h hirvoudi.*

**IX DIVIZ**

**LOULL, YANNIG, azezet atao. <sup>†</sup> ROGENNEK, DENEZ, BOLOD.**

**KROGENNEK da Zenez**

Me zo bras va c'heuz, aotrou Denez, da veza ho taolet er meaz, mes me n'hoc'h anavezzen ket ; *o tiskouez Loull hag ar skraper ze, gwisket gant ho sae, a oa gantan doare eur barner awale'h.*

**BOLOD, o welet e draou en eur c'horn.**

Sellit ! setu va holl draou kemmeskét war an douar, va morzol, va zurquez, va dillad, va boutaillou gouillo. *Hirvoudi a ra Loull ha Yannig.*

**<sup>†</sup> ROGENNEK**

Staga start a rin an daou ganfard se an eil oc'h égile d'o c'has d'ar prizoun.

**BOLOD, o lakaat Loull ha Yannig dà gaout aoun.**

Ne vezoo ket ezomm. Evet o deus ar pez oa em boutail vihan. Eul lou'ou eo e oa ebarz, eul louzou eus ar re grenva evit ar zaout klanv. Mervel a raint da genta.

LOULL, *spountet neat.*

O ! aotrou benniget ! Truez ! truez evit tud paour.

YANNIG, *o welâ dourek*

O ! santez Vendrok ! patrounez va mamm geaz, ne fell ket d'in mervel.

DENEZ

Da genta, en em ziwiskit. Ar zaeou ze n'int ket d'eo'ch.

LOULL

Gwir eo, aotrou barner gwir eo. *En em ziwska a reont o daou, oc'h hirvoudi.*

DENEZ

Araok mervel, gwelet a rit mat ar pez a c'hoarvez ganeoc'h. Al laer a zo fin a weachou, gwir eo. Mez eun deiz pe zeiz, paket eo, abred pe zivezad.

YANNIG

Ho pet truez ouzin, aotrou medisin chatal. Roit eul louzou mat d'eomp... mar... plij...  
*Yannig a gousk mik.*

LOULL

Ia, ho pet truez... ouzomp ... ouz...  
*Loull a gousk mik.*

BOLOD, *d'ar re all, o c'hoarzin*

Kousket a reont evel diou varriken. Ne varvint ket. Ar pez o deus evet n'eo ket evit rei

d'ezo eun taol mervel. Kasit anezo kousket mik d'an toull, mar kirit, aotrou Denez.

Dihuna a raint e tro an abardaez.

DENEZ *da Grogennek*

Mat. It da gerc'hat eur c'harr bennak d'o c'has o daou d'ar prizoun.

KROGENNEK

Ia, aotrou barner.

DENEZ

Echu eo an abadenn. Ha setu breman ive ar gentel : Micher al laer ne ket eur vicher vat eo ez eo.

*Ar goel a zisken*